

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ Radio Kreiz Breizh

HAD

Had

Un anv boutin keltiek an hini eo hag a vez kavet e kembraeg da skouer, hadau

An had

Un hadenn = ur c'hreunenn had



Hadoù, pa vez kaozeet deus un had resis

War dachenn al labour-douar

Hadañ a zo un dra a-bouez, un arouez

An haderez, war ar pezhioù lurioù gwechall evel arouez an deskadurezh



Un haderez, ur vaouez oc'h hadañ pe ur mekanik da hadañ

Mamm-gozh Herri a lâre :
« Mat eo hadañ an douar war an diskar deus al loar »


http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudenoù_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Had-lann pe lann-had

Hadlanna, mont da serriñ had-lann


Alies e veze kaset ar vugale da adlanna ken difonn e oa al labour-se d'ober...

« Kas un den da serriñ had-lann »,
evit ober fent deus un den,
kas unan bennak da lusa
« Kaset 'meus 'nañ da adlanna »



Ar ger had a vez implijet evit ar greun met ivez traoù da blantañ

Had-pato
pe
pato-had



Had-gwinizh
Had-kerc'h
Had-heiz

Had-segal
Had-mais
Had-patur,
had-geot evit al loened

Had kaol-moc'h


« Ret eo troc'hañ ar c'haol-moc'h 'raok neuint teulet an had »

War dachenn ar mennozhioù

« Nimp zo 'hadañ 'vit an amzer da zont »

Diwan = an had o tiwanañ

Un hader,
gant ur ster relijiel kentoc'h,
« an hader mat »



Cofinancé par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec le Fonds européens
de développement régional